

KANTIK INTRON VARIA AR FEUNTEUNIOU

Gouezec

- : - : - : - : - : - : - : - : - : -

Diskan

Var don: Rumengol

Intron Varia 'r Feunteunioù
 Guerc'hez, mammen an oll c'hrasou
 Hor Zikouret e peb mare
 Da viret mat lezenn Doue.

I

Dour ar feunteun a zo roet
 D'an den da dorri e zec'hed
 Gant o krasou, ô Mamm Doue,
 'Ve torret sec'hed an ene.

2

Dour ar feunteun zo mat ouspenn
 Da velc'hi an traou digempen;
 Mari, an eneou sotret
 Gant dour o krasou ve guelc'het.

3

Dour ar feunteun, pa red er prad,
 A ra d'a yeôt divoana mat;
 Guerc'hez, lakit ar vertuioù
 Da zivoana er c'halonou.

4

Kreskit ar fei ennomp bemde
 Gant ar fianz, ar garante,
 Evel ma kresk ar bokedou,
 Pa ve douret mat o grouioù.

5

Er Feunteunioù veler aman
 Ve dour etre daou benn ar bla;
 En o kalon ne vank morse
 Ar grasou red d'o pugale.

6 4

Pa renkfomp mont eus ar bed-man
 Roit domp, ô Intron Varia,
 Var dreujou an eternite
 Jezuz ar guir dour a vue.